



# CANTIC

CHRIST VRAS AN ITRON VARIA AR VUB,

BREMA EN ILIS SANT VAZE

E MONTROULEZ.

*Ver tan guerz ar Bretele.*

Eur vatimant nevez-slam a Rouantelez Franc  
A zo bet et mor bras evit poursui e chanç.  
Diou vatimant d'ar zozow o deusi poursuiwet.  
Sioas, a dennou canol evit e c'homeret.

Ar vatimant eus a Franc, o soujal achapi.  
A zo bet en eur gavet e coste Barbari;  
Ere e voe golcet eus a dennou canol,  
Qem a sonjet voa collet e creis fous ar mor dou.

Setu ta ar vatimant ar vech-màn gemeret.  
Hac ebars en abordach cals a dud zo blesset;  
Demeus a zozon memes couls hac a christenien.  
Gant ar barbaret neuze ne voe espernet den.



F  
201

002.197/a

— 2 —

E lonç ar valimant Franç o deveus bet cavet  
 Eur Crusufi ar gaera a voa biscoas guelet ;  
 Eur Crusufi ar gaera a voe var an douar  
 Abaoue ma zeo maro Jesus var ar C'halver.

Pa veljont ar Crusufi a Jesus hor Zalver ,  
 Er commansjont da grial ha da lamet en ër.  
 Setu aman'r fals profet, Doue ar Christenien,  
 Gœlomp hac en so capabl brema d'en eur difen.

Ar zozon , ar barbaret a ra un drajedi  
 Gant ar Crusufi Santel er qær a Varbari ,  
 Demeus a dennou canol hac a dennou mouselet  
 Ar Crusufi adorabl eus murail qær laqêt.

Ne voa payan na tiran na scouisent o clêvet  
 Al leon , ar blasfêmou eno o deus losqet.  
 Bras è madeles Doue pa ne zint ecrâzet  
 Gant an tan pe a gurua, pe en douar lonqet.

Guelomp ama , Christenien , pebes punision  
 O deus bet ar barbaret qercouls hac ar zozon :  
 An tan demeus an êvou a so bet disqennet  
 Var magazinou ar poultr , tri mil di zo losqet.

Setu ama eur miracl a gle touch ho calon ,  
 En deveus grêt hor Zalver en presanç ar zozon :  
 An tan var ar Crusufi ar goad en deus scuillet  
 Evel ma ras hor Zalver pa voe crusufiet.

— 3 —

Daou Dad Santel Cabucin, a urs Sant Malburin  
 En em strincas d'an douar var bennou o daoulin,  
 Hac e c'houloujout ar C'hrist evit dont de breña,  
 Hac e laejent arc'haut da gontre-poes ounta.

Ar zozon, ar barbaret an eur gavas contant  
 O clévet o devije eur son bras a arc'haut,  
 Leqit oc'h aour er valans da gontre-poes anean,  
 Hac o pezo ho Toue. It pa g'eret gantan.

Clévit amàn tud devot, tud piavidic pe baour;  
 Laqet voe ar Crusifi da boeza gant an aour;  
 Pemp cant liour a oa enna p'oa laqet er valans;  
 Pemp lous aour e save, ha c'hoas o devoa laus.

Omàn so eur Crusifi a so miraculus,  
 Hac a so ar guir bortret eus hor Zælver Jesus,  
 Pa vao ganemp er bed-man leun demeus a vne:  
 Meulet ra vezo Jesus en douar hac en én.

Antreet eo ar vatiment e Rouantelez Franq,  
 Er qær eus a Voutroulez gant peb seurt assuranc;  
 Ar c'hleier a Voutroulez o uañ a zonne,  
 An oll a voa estonet e velet qemense.

Ar Crusifi adorabl, rentet e Montroulez,  
 Garg'et ebars en eur c'har evit mont var a mes,  
 Eis aneval voa ontan vit e gas da Bloufin;  
 Eqichen Ilis ar Vur e chomas a la fin.

— 4 —

Ebars en q̄er Montroulez, en ti Guere'hes ar Vur,  
 Voa guechal ar Crucifi visitet gat tud fur;  
 Eno ezeo bet chomet nombr bras a vlayezion,  
 Hac epad an amzer ze ré eals a viraclon.

Aboe ma zé distrujet an ilis devot' se,  
 Eman Crucifi gaer-ma en ilis Sant-Vuze;  
 Itron Varia ar Var a so ive enni;  
 Rac se ta, oll Vrefonet, d'emp ep fot d'o fedi.

Habitantet Breis-izel, deut oll da Sant Vaze,  
 Deut da offr o pedennou da Ronanez an'én;  
 Ma no'e'heus affliccion, deut a greis o calon  
 Da visita'r plaq̄ santel gant gvir devosion.

Cals a so a Christemien pere no sonjont qet,  
 Eve necesser ar groas evit bea salvet;  
 Birvigen den antre en Barados Douc,  
 Ma na zougont qet ar groas etro pad o bue.

An oll Sent ha Senteset o deveus bet doug'et  
 Ar groas demeus a Jesus so bet erusuffiet;  
 Oll ebestel hor Salver so bet merzeriet,  
 Hac ar profet Isai a so bet esqennet.

Hor Mam Santel an ilis a deu d'ou exorté  
 Da gavet recours d'ar groas etro pad hor bue;  
 En heur hor maro memes en hor Sacramenton,  
 Dre ar groas eicomancer an oll fouesionou.

— 3 —

Croas an honor a Jesus a so ger puissant  
 Mar ra d'an oll dioghau tec'hel en un instant  
 Deus ar bec'herien memes, mar goulenoui pardou  
 Digant Jesus hor, Salver deus a greis o e'ha'ou.

Pa deui Satan d'o tenti ; resistit gat courach,  
 Roit ho calon da Jesus hac e tec'hel al las,  
 Grit sin ar groas var ho tal ha var boull ho calon,  
 Galvit Jesus d'o sicour, soujit er Bassion.

Setu nze, Christenien, histor ar Crusuff,  
 Deomp oll d'e adori hac ar Verc'hes Vari,  
 Induljançou cals memes a so bet acordet  
 Da neb zougo aueze gaat devosion harfet.



## GUERS

VAR BASSION JESUS-CHRIST.

*Var an ton ancien.*

Æles an èn, deut d'an douar,  
 Disqennit var memes Calver,